



STAD AR C'HELENN DIVYEZH EK E BREIZH E 2007

- **ROADENNOÙ AN DISTRO-SKOL
2007**
- **STADEGOÙ AR BLOAVEZH-SKOL
2006/2007**

Bilañs an distro-skol 2007

Sifroù pennañ

Digoradurioù

- **8 lec'hiad divyezhek nevez er c'hentañ derez** (dek e 2006) :
 - 4 gant an hentad publik
 - 3 gant an hentad prevez katolik
 - 1 gant an hentad dre soubidigezh (Diwan).
- **3 skol ouzhpenn a ginnig ur c'hendalc'h en eil derez** (tri e 2006)
 - 2 gant an hentad publik : e Kewenn hag e Naoned
 - 1 gant an hentad prevez katolik e Gwengamp

Sifroù

- **11 740 skoliad divyezhek** a zo e Breizh bremañ ha 24 e Pariz :
 - 2 967 er skolioù Diwan (ha 24 e Pariz)
 - 4 634 er c'hlasoù divyezhek publik
 - 4 136 er c'hlasoù divyezhek katolik.
- **665 skoliad divyezhek ouzhpenn** e Breizh e-keñver 2006 (668 a oa e 2006 e-keñver 2005).
- En e uhelañ emañ ar c'hresk er skol gentañ : +316 (+237 "hepken" er skol-vamm).
- Ar peder fempvedenn eus ar c'hresk a zeu eus ar c'hentañ derez.
- E **bro Vrest** emañ o chom tost ur c'hard eus skolidi divyezhek Breizh atav. Derc'hel a ra he fouez dreist.
- **Gwened** a chom ar gumun a skoliata ar muiañ a skolidi divyezhek (577).

Emdroadurioù

- Kreskiñ a ra an niver a skolidi divyezhek eus **6% e Breizh** (6,2% o kontañ Pariz) : **ar c'hresk izelañ abaoe 1981**.
- En **hentad divyezhek publik** emañ ar c'hresk brasañ adarre : **+8,7%** (9,9% e 2006).



Ar c'hinnig kelenn divyezhek e 2007/2008


D'an distro-skol 2007, eus ar skol-vamm d'al lise e renabler e Breizh **364 lec'hiad** (345 lec'hiad e 2006/2007) ma vez kinniget un hentad divyezhek da nebeutañ. Dasparzhet int e **122 gumun disheñvel** (114 e 2006/2007), da lavaret eo 8,2% eus kumunioù Breizh. Ul lec'hiad ouzhpenn zo e Pariz.

Er c'hentañ derez

8 lec'hiad divyezhek nevez a zo er c'hentañ derez d'an distro-skol 2007 :

- 4 gant an hentad publik (5 e 2006) : Bear (22), Benac'h (22), Plougonvelen (29) ha Plozeved (29).
- 3 gant an hentad prevez katolik (3 e 2006) : Gwitreg (35), Perroz-Gireg (22) ha Surzhur (56).
- 1 gant Diwan : Kastellin (29).

Stad diorren ar c'helell divyezhek er c'hentañ derez (skolioù-mamm ha skolioù kentañ) - Distro-skol 2007



166 lec'hiad a gont er skol-vamm, 155 er skol gentañ. An hentad divyezhek publik eo a ginnig ar muiañ a lec'hiadoù : 70 lec'hiad divyezhek er skol-vamm. Digoret en deus an hanter eus al lec'hiadoù nevez d'an distro-skol-mañ adarre. E Breizh, en deskadurezh dre-vras, e vez skoliataet an darn vuiañ eus ar skolidi en deskadurezh publik (war-dro 60%). Neoazh, gant an hentad prevez eo ez eus bet digoret ur c'hlas divyezhek e Gwitreg.

Emdroet eo war an tu mat emzalc'h Ensellerezh Akademiezh Aodoù-an-Arvor en deus digoret daou lec'hiad publik tra ma ne oa bet digoradur ebet a seurt-se eno abaoe 2002.


Anat eo pegen pouezus eo evit ar gerent kaout ur c'hinnig tost d'o lec'h annez. Gwelet a reer war ar gartenn diaraok e chom toulloù e kornôg Breizh ha tachennoù gwerc'h ledanoc'h c'hoazh er reter. Mantrus eo neuze ne vefe ket bet digoret, er bloaz-mañ adarre, un toullad lec'hiadoù evit abegoù melestradurel pa oa trawalc'h a vugale ragenskrivet enno (Gwizien, Sant-Stefan-Bregoloù, Pornizh, Ploveren, h.a.). Eizh vloaz zo bremañ n'eus bet digoret lec'hiad nevez ebet el Liger-Atlantel.

En eil derez

D'an distro-skol 2007, **3 skol ouzhpenn** a ginnig ur c'hendalc'h en eil derez gant ar c'helenn divyezhek :

- 2 gant an hentad publik : ur skolaj e Kewenn (56) hag ur skolaj e Naoned (44) (hep danvez nann-yezhel ebet).
- 1 gant an hentad prevez katolik (3 e 2006) : ur skolaj e Gwengamp (22).

Stad diorren ar c'helenn divyezhek en eil derez (skolajoù ha liseoù) - Distro-skol 2007



An darvoud pouezusañ evit an eil derez d'an distro-skol-mañ eo digoradur lec'hiad kentañ al Liger-Atlantel.


Un diaester a zo evit renabliñ lec'hiadoù an hentad publik en eil derez : pa n'eus nemet un danvez zo kelennet e brezhoneg en unan anezho (kentelioù brezhoneg peurliesañ) ne vez ket anavezet evel lec'hiad kelenn divyezhek par-ouzh-par (gant gwir abeg). Evel-se emañ kont gant lec'hiad Naoned koulz ha gant hini Pondi abaoe ar bloaz-mañ. Padal ar skolajidi-se o deus bet un deskadurezh divyezhek betek-henn, n'emaint ket o kregiñ gant ar yezh evel skolajidi all a gemer brezhoneg evel danvez dibab. Riskloù zo gant se e vefe tud yaouank gant ur c'helenn brezhonek bennak ha ne vefent kontet neblec'h.

An niver a skolidi divyezhek

Sifroù an distro-skol 2007

11 740 skoliad o deus un deskadurezh divyezhek brezhoneg-galleg e Breizh d'an distro-skol 2007 (11 764 o kontañ Pariz). Da lavaret eo ez eus **665 skoliad ouzhpenn** en hentadoù divyezhek e Breizh e-keñver 2006.


Dasparzh an niver a skolidi divyezhek dre zepartamant - Distro-skol 2007



Penn-ar-Bed eo atav an departamant a skoliata **ar muiañ a skolidi divyezhek** e Breizh, met n'eo ket ken dreist e bouez hag er peurrest eus poblañs ar yezherien avat (tremen 50% eus ar vrezhonegerien deuet d'o oad a oa o chom e Penn-ar-Bed hervez enklask 1999 an EBSSA¹). Stabil a-walc'h eo dasparzh ar skolidi dre zepartamant e-keñver warlene.

¹ EBSSA : Ensavadur Broadel ar Stadoù hag ar Studioù Armerzhel (INSEE e galleg)

Dasparzh an niver a skolidi divyezhek dre live ha dre zepartamant - Distro-skol 2007




En holl zepartamantoù, **en tu all da beder fempvedenn eus ar skolidi divyezhek zo er c’hentañ derez.**

Evit ar wech kentañ e 2007 **ez eus muioc’h a vugale er skolioù kentañ eget er skolioù-mamm** (gant ar sifroù kriz : 5043 e-skoaz 4961). Disoc’h digoradurioù ar bloavezhioù diwezhañ eo evel-just (en em gavout a ra ar skolidi nevez er skol gentañ) met arouez gorrekadur emdroadur sifroù ar c’helenn divyezhek eo ivez.

An hanter muioc’h a skolidi divyezhek zo er Mor-Bihan er c’hentañ derez eget en Aodoù-an-Arvor : 25 lec’hiad nevez zo bet digoret er Mor-Bihan abaoe 2000, 13 en Aodoù-an-Arvor hepken.

Dasparzh an niver a skolidi divyezhek dre hentad ha dre zepartamant - Distro-skol 2007




- Hentad kevredigezhel (Diwan)
- Hentad an deskadurezh publik
- Hentad an deskadurezh prevez katolik

Notenn : a-vent gant an niver a skolidi en departamant eo pep kelc'h

An hentad **publik** eo a skoliata **ar muiañ a skolidi divyezhek** atav (4 637). Gantañ emañ ar c'hresk brasañ er bloaz-mañ ouzhpenn-se (+371 skoliad).


Dasparzh an niver a skolidi divyezhek dre live ha dre vro - Distro-skol 2007




N'eus kinnig divyezhek ebet e 10 eus 29 bro Breizh (ha c'hoazh e vefe teir nebeutoc'h m'o dije digoret al lec'hiadoù raktreset evit an distro-skol-mañ e Gwizien, Sant-Stefan-Bregoloù ha Pornizh). A-drugarez d'ar c'hlas divyezhek digoret e Gwitreg d'an distro-skol-mañ e konter 19 bro gant ur c'hinnig bennak e-skoaz 18 warlene. Paouez a ra ar c'hinnig e fin ar c'hentañ derez e 5 bro, er skolaj e 8 bro ouzhpenn ha ne gendalc'h ar c'hinnig betek al lise nemet e 6 bro.

Bro Vrest a chom ar vro a zegemer ar muiañ a skolidi divyezhek : tost ur c'hard eus skolidi divyezhek Breizh zo skoliataet eno (22,6% e-skoaz 23% e 2006). Gant bro Kêr-Wened ha bro Gerne emañ ar c'hresk brasañ er bloaz-mañ avat : 111 skoliad ouzhpenn evit pep hini anezho e-skoaz 106 skoliad ouzhpenn gant bro Vrest. En teir bro-se e kaver un hanter eus ar skolidi zo ouzhpenn e Breizh a-bezh e 2007. Kenderc'hel a ra an hentad divyezhek da ziorren da gentañ er broioù ma oa staliet mat dija.

Dasparzh an niver a skolidi divyezhek dre hentad ha dre vro - Distro-skol 2007



Tuadurioù emdroadur an niver a skolidi divyezhek dre gumun - Distro-skol 2007




Gwened a chom ar gumun a skoliata ar muiañ a skolidi divyezhek eus ar skol-vamm d'al lise gant **577 skoliad** e 2007. Neoazh, e **Roazhon** eo e kaver an niver brasañ a skolidi divyezhek er c'hentañ derez. Dre-vas, pa renker ar c'humunioù diouzh sifroù ar c'hentañ derez eo kêrioù-penn departamantoù Breizh a zeu da gentañ (en urzh : Roazhon, Gwened, Naoned ha Kemper) nemet Sant-Brieg a erru d'ar 17^{vet} renk hepken.

Un digresk a verzer gant an niver a skolidi e 33 eus ar 123 c'humun ma'z eus un hentad divyezhek d'an nebeutañ e 2007 ; chomet eo heñvel an niver-se e 8 kumun ouzhpenn. Da lavaret eo, e-giz warlene, ne ya ar sifroù war-raok nemet en div drederenn eus ar c'humunioù pa oa un emdroadur en tri c'hard eus ar c'humunioù er bloavezhioù a-raok.

Emdroadur an niver a skolidi divyezhek


Emdroadur an niver a skolidi divyezhek dre hentad - Distro-skol 2007



Kenderc'hel a ra poblañs ar c'helenn divyezhek da greskiñ a vloaz da vloaz abaoe an deroù. Neoazh, anat eo bremañ ne vo ket tu da dizhout an 20 000 skoliad bet lakaet da bal a-benn 2010 gant Kuzul-rannvro Breizh. Hervez hor jedadennoù ma kendalc'hfe an emdroadur gant ar memes lusk e vefe 14 000 skoliad divyezhek e 2010 d'ar gwellañ tout.


E gwirionez, kadarnaat a ra ar grafikoù amañ da-heul eo bihanoc'h-bihanañ an niver a skolidi divyezhek ouzhpenn da bep distro-skol ha seul vihanoc'h neuze ar c'hresk bloaziek.

Emdroadur an niver a vugale ouzhpenn en hentad divyezhek da bep distro-skol etre 1997 ha 2007




Ret eo mont dek vloaz en a-raok evit kavout ur c’hresk ken izel e sifroù kriz hag e 2007 : 665 skoliad ouzhpenn hepken tra ma oant 612 e 1997 d’ur mare ma save an hollad da 4 011 skoliad divyezhek.

Emdroadur kresk bloaziek ar c’helenn divyezhek etre 1997 ha 2007



Biskoazh n'eo bet ken bihan kresk bloaziek ar skolioù divyezhek (e-keñver dregantad) : +6%. Izeloc’h-izelañ eo abaoe 2004. Rannet dre dri eo bet feur ar c’hresk bloaziek en ur ober 10 vloaz.

Emdroadur an niver a skolidi divyezhek dre zepartamant etre 1997 ha 2007




Feur emdreiñ etre 1997 ha 2007

Aodoù-an-Arvor	+147,7%
Penn-ar-Bed	+162,7%
Il-ha-Gwilen	+270,1%
Liger-Atlantel	+243,4%
Mor-Bihan	+259,4%
Breizh	+192,7%

Ne emdro ket ken buan ar sifroù en Aodoù-an-Arvor hag e departamantoù all kornôg Breizh ; an diouer a zigoradurioù abaoe 2000 zo kaoz emañ kont evel se (en desped d’an tri digoradur bet d’an distro-skol-mañ). A-hend-all, war c’horrekaat ez a kresk ar c’helenn divyezhek er Mor-Bihan er bloaz-mañ, disoc’h diaesterioù an diorren en hentad prevez eo peurgetket. Nec’hus eo dreist-holl emdroadur ar sifroù el Liger-Atlantel ma chomont tost heñvel goude digresk warlene.


Feur emdreiñ an niver a skolidi divyezhek dre hentad ha dre zepartamant d'an distro-skol 2007 e-keñver hini 2006



Heñvel eo kresk hollek Penn-ar-Bed ouzh ar pezh a oa warlene. En departamantoù all eo un tamm gwelloc’h feur emdreiñ hollek 2007 eget hini 2006, nemet er Mor-Bihan (3 fount nebeutoc’h e-skoaz warlene). An departamant ma oa kresket ar buanañ an niver a skolidi divyezhek etre 1996 ha 2006 e oa hemañ diwezhañ koulskoude.

Evel e 2006 e weler e teu ar brasañ eus kresk 2007 eus an hentad publik (e Penn-ar-Bed peurgetket), met war vihanaat ez a kresk an hentad-se (8,7% e-skoaz 9,9% e 2006). Kevatal eo kresk hollek an hentad prevez katolik ouzh hini 2006 (6,4%) tra ma oa kalz brasoc’h er bloavezhioù a-raok (tost da 20% e oa ar c’hresk keitat etre 1996 ha 2005). Gwall vihan e chom kresk bloaziek Diwan (bihanoc’h eget e 2006) ; n’eo ket deuet a-benn c’hoazh da adkavout al lusk a oa gantañ a-raok ma vefe nac’het e enframmadur en deskadurezh publik (2002).

Feur emdreiñ an niver a skolidi divyezhek dre hentad ha dre zepartamant d'an distro-skol 2007 e-keñver hini 2006



Mont a ra an niver a skolidi divyezhek war gresk gant ar c'hentañ derez hag ar skol gentañ dreist-holl : eno emañ ar c'hresk uhelañ gant ar sifroù kriz (+316 da lavaret eo tost an hanter eus kresk an holl liveoù bodet). Dre vras eo kadarnaet an emdroadur a oa bet merzet warlene : n'eo ket kenkoulz ar c'hresk er skolioù-mamm hag er skolioù kentañ (gwir eo ivez gant ar c'henfeurioù). Un emdroadur nec'hus eo hag a zispleg perak e c'horreka emdroadur sifroù an deskadurezh divyezhek a vloaz da vloaz : re nebeut a zigoradurioù a zo e pep hentad en abeg d'ar skoilhoù a vez lakaet dezho.

Mont a ra an niver a skolidi war gresk a-drugarez da bPenn-ar-Bed ha d'ar Mor-Bihan : tremen an tri c'hard eus ar c'hresk a zeu eus an departamantoù-se. Pa seller ouzh ar feurioù emdreiñ er c'hentañ derez e verzer emañ ar sifroù gwellañ gant Penn-ar-Bed hag Il-ha-Gwilen ; al Liger-Atlantel zo er penn a-dreñv, dre m'eo bet nac'het pep raktres nevez er XXI^{añ} kantved.

Un emdroadur a zalc'h gant e duioù mat hag e duioù gwan

War greskiñ ez a poblañs an hentadoù divyezhek e Breizh d'an distro-skol 2007 atav. Merzout a reer ivez ez a ar c'hinnig war wellaat er bloaz-mañ (digoradur e Gwitreg, kendalc'h en eil derez e Naoned), un dra yael-kenañ eo. Da dachennoù a oa goullou c'hoazh en em astenn : kornôg bro Gerne, kreiz Penn-ar-Bed ha reter Il-ha-Gwilen. E lec'hioù all e chom stag an diorren ouzh ar c'hornioù-bro o doa lañs dija : kornôg Aodoù-an-Arvor, bro Vrest ha bro Kêr-Wened.

Kement-se zo disoc'h strivoù ar bed kevredigezhel ha kerent ar skolidi e gwirionez. A-frapadoù e tigoror klasoù divyezhek atav ha meur a raktres zo chomet boud gant kudennoù melestradurel (Ploveren, Gwizien, Pornizh). Anat eo an diouer a bolitikerezh evit steuñvekaat diorren ar c'helenn divyezhek e Breizh.

Al Liger-Atlantel eo an departamant nemetañ ma n'eus bet digoret klas divyezhek nevez ebet er c'hentañ derez. Tremen an tri c'hard eus ar skolidi zo ouzhpenn en distro-skol-mañ a gaver en daou zepartamant a skoliata ar muiañ a skolidi divyezhek c'hoazh : Penn-ar-Bed hag ar Mor-Bihan. Goude pemp bloavezh hep lec'hiad publik nevez ebet en Aodoù-an-Arvor en deus asantet an Ensellerezh Akademiezh e vefe digoret daou glas. En em c'houlenn a reer en abeg da betra ez eus bet gortozet ken pell ; dilerc'h an dilañs-se zo splann dija (s.o. ar gartenn p. 13).

N'eo ket kempoell an digeriñ klasoù divyezhek e Breizh. Kompren a reer neuze e vank amañ un emouestl fetis a-berzh ar re zo e penn evit strivañ a-gevret da ziorren an deskadurezh divyezhek. Evit keñveriañ, en ur ober daou vloaz, n'eus bet digoret nemet triwec'h lec'hiad divyezhek er c'hentañ derez e pemp departamant Breizh tra ma'z eus bet digoret daouzek lec'hiad evit an euskareg war dachenn un hanter departamant (ar Pireneoù Atlantel).

Biskoazh n'eo bet ken bihan kresk bloaziek ar skolioù divyezhek (e-keñver dregantad) : +6%. Evit ar pezh a sell ouzh ar sifroù kriz, ne oa ket bet ken izel ar c'hresk abaoe dek vloaz : 665 skoliad ouzhpenn hepken (da geñveriañ gant +612 skoliad e 1997 pa save an hollad da 4 011 skoliad hepken). N'eus ket bet digoret a-walc'h a glasoù nevez hag un digresk a zo e tremen ur c'hard eus ar c'humunioù a zegemere un hentad divyezhek dija.

N'eus nemet dre ledañ an hentadoù divyezhek da skolioù nevez e c'hallow ar c'hresk bezañ startaet war verr dermen. Ne c'hellow ar c'helenn divyezhek mont war-raok nemet dre ziorren ha dre greñvaat ar c'hinnig an tostañ ar gwellañ d'al lec'h m'emañ an dud o veañ.

Pennaenn ar c'hendalc'h en deskadurezh divyezhek ne zoujer ket dezhi : ar c'helenn divyezhek ned a ket war ziorren en eil derez en desped d'an ezhommoù. Un troc'h a zo atav er c'hinnig etre ar CM2 hag ar 6^{vet} klas.

Un emdroadur gorrekaet daoust d'an danvez da ziorren a zo

Daoust da c'houlenn ar gerent n'eus bet digoradur ebet en **deskadurezh publik** nag en Il-ha-Gwilen, nag el Liger-Atlantel, nag er Mor-Bihan er bloaz-mañ : bras a-walc'h e oa an niver a vugale ragenskrivet e Gwizien, e Ploveren hag e Sant-Stefan-Brengoloù koulskoude. Ken pell zo n'eus bet digoret lec'hiad divyezhek publik ebet e departamantoù reter Breizh (4 bloaz eo al lec'hiad diwezhañ, hini Bruz) m'en em c'houlenner ha posupl eo en ober c'hoazh. Da-heul cheñchamantoù e renerezh an **deskadurezh katolik** eo koazhet a-galz lusk diorren an hentad prevez abaoe daou vloaz. Daoust ma adkrog **Diwan** da zigeriñ skolioù nevez, ne zeu ket a-benn an hentad dre soubidigezh da adkavout an nerzh a oa gantañ a-raok nac'hadenn e enframmadur en deskadurezh publik, dalc'het ma vez gant diaesterioù arc'hant ha lojeiz.

Daoust da bep tra e kresk sifou an tri hentad ha peursplann eo n'eo ket dre ziouer a c'houlenn sokial e c'horreka lusk diorren ar c'helenn divyezhek met kentoc'h en abeg d'ar

skoilhoù gwashoc'h-gwashañ lakaet gant an ensavadurioù e karg peurgetket. A bouez bras eo harp strollegezhioù lec'hel Breizh e budjed ar c'hevredigezhioù met o c'hrog war pennadurezhioù an deskadurezh e Breizh zo kalz re wan.

Goulennoù ne vez ket respontet dezho

Muioc'h-mui a drouz a sav gant ar bed kevredigezhel a vloaz da vloaz e gwirionez. Ouzhpenn an diaesterioù lakaet gant ar Rektoriezh hag Ensellerezhioù Akademiezh zo d'an digeriñ lec'hiadoù publik nevez ha d'ar c'hendalc'h en eil derez e kav Div Yezh abeg en doare m'eo meret koskor an hentad par-ouzh-par koulz hag e politikerezh ar poloù. Klemm a ra Dihun ouzh bolontez fall an deskadurezh katolik e Breizh hag an diouer a genlabour eus he ferzh evit an diorren. Tamallet en deus Kuzul Sevenadurel Breizh he folitikerezh strishaat da Rektoriezh Roazhon ha diogeliñ a ra ar gwir a zo da gaout ur servij publik nes evit an deskadurezh divyezhek. En em drechalet eo Unvaniezh ar Gelennerien Brezhoneg e vefe lakaet ar memes live yezh da bal evit ar c'helenn divyezhek hag evit ar brezhoneg evel danvez dibab e programm an deskadurezh Stad evit an distro-skol 2008 ; goulennet he deus, gant se, e vefe savet programmoù a ziforc'h ha lakaet palioù uhelek evit an hentad divyezhek.

Ouzhpenn d'an tuadurioù nec'hus meneget a-us e ranker en em chalañ ivez eus an niver a studieren danvez kelennerien a goazh spontus er mare-mañ (-32,9% etre 2002/2003 ha 2006/2007). Ha merzout a reer ivez e koazh an niver a studieren en Aotreegezh I&II (-49,4% etre 2002/2003 ha 2006/2007), homañ mammenn bennañ an danvez kelennerien. Ul labour kehentiñ a bouez a zo d'ober evit desachañ muioc'h a dud da vicherioù an deskadurezh kuit da ziorren ar c'helenn divyezhek chom boud dre ziuver a gelennerien nevez. Lañs ar stummadurioù c'hwec'h miz war ar brezhoneg evit an dud deuet a c'hell bezañ un diskoulm d'ar gudenn-se.

Krog bed politikel Breizh war diorren ar c'helenn divyezhek

Bremañ m'eo echu mare ar stagadenn d'ar Gevrat-steuñv Stad-Rannvro 2000/2006 war an divyezhegezh, e ouzer n'eo ket bet doujet d'he fromesaoù gant ar Stad. Merzout a reer ivez ne emdro ket war an tu mat kresk an hentadoù divyezhek abaoe m'eo bet krouet Kuzulioù Akademiezh ar yezhoù rannvro e 2001.

Daoust d'an nevezenti yael-kenañ eo bet ar steuñv politikerezh yezh embannet gant ar C'huzul-rannvro e 2004 eo splann bremañ ne vo ket tizhet ar pal a 20 000 skoliad a-benn 2010. Skoaziadoù kreñvaet ar Rannvro da labour ar c'hevredigezhioù kerent peurgetket n'o deus lakaet harz ebet da dech kresk bloaziek an niver a skolidi da c'horrekaat. Anat eo n'eus nemet gant ur steuñv diorren youlek, resis (dezhañ ispalioù war an dachenn hag en amzer) ha klok (gant palioù stummañ kelennerien) e c'hello ar c'helenn divyezhek kavout ul lusk nevez. Ur steuñv a seurt-se a rankfe bezañ douget gant ar pennadurezhioù lec'hel dezho da sevel ar c'henemglevioù ret evit emouestlañ an ensavadurioù barrek (Rektoriezh, CAEC, DDEC, h.a.) en e gas da benn. Seurt traoù a vez graet c'hoazh e lec'h all e Frañs (evel en Euskadi da skouer).

Arvarus e c'hell bezañ chom hep en ober zoken bremañ ma ra anv al lezenn eus seurt kenemglevioù savet gant ar Stad hag ar strollegezhioù lec'hel².

² Mellad L312-10 kod an Deskadurezh Stad da-heul embannadur al lezenn Fillon e 2005 : « Un enseignement de langues et cultures régionales peut être dispensé tout au long de la scolarité selon des modalités définies par voie de convention entre l'Etat et les collectivités territoriales où ces langues sont en usage... »

STAGADENNOÙ GANT SIFROÙ DISTRO-SKOL 2007

An niver a lec'hiadoù divyezhek dre zepartamant ha dre live - Distro-skol 2007

	Skol-vamm	Skol gentañ	Skolaj	Lise	HOLLAD
Aodoù-an-Arvor	31	27	5	1	64
Penn-ar-Bed	66	62	14	5	147
Il-ha-Gwilen	10	9	2	1	22
Liger-Atlantel	5	5	1	-	11
Mor-Bihan	54	52	13	1	120
HOLLAD	166	155	35	8	364



Sifroù aet war greskiñ



Sifroù aet war zigreskiñ

An niver a lec'hiadoù divyezhek e Breizh dre hentad ha dre live - Distro-skol 2007

	Skol-vamm	Skol gentañ	Skolaj	Lise	HOLLAD
Skolioù Diwan	35	33	5	1	74
Lec'hiadoù divyezhek publik	70	63	14	6	153
Lec'hiadoù divyezhek katolik	61	59	16	1	137
HOLLAD	166	155	35	8	364



Sifroù aet war greskiñ



Sifroù aet war zigreskiñ

An niver a skolidi divyezhek dre zepartamant ha dre live - Distro-skol 2007

	Skol-vamm	Skol gentañ	Skolaj	Lise	HOLLAD	Kresk bloaziek	Kresk bloaziek e %
Aodoù-an-Arvor	824	834	234	30	1922	97	5,3%
Penn-ar-Bed	2045	2033	703	244	5025	350	7,5%
Il-ha-Gwilen	339	377	81	21	818	56	7,3%
Liger-Atlantel	185	195	8	-	388	8	2,1%
Mor-Bihan	1568	1604	387	28	3587	154	4,5%
BREIZH	4961	5043	1413	323	11740		
Kresk bloaziek	237	316	90	22		665	
Kresk bloaziek e %	5,0%	6,7%	6,8%	7,3%			6,0%



Sifroù aet war greskiñ



Sifroù aet war zigreskiñ

An niver a skolidi divyezhek e Breizh dre hentad ha dre live - Distro-skol 2007

	Skol-vamm	Skol gentañ	Skolaj	Lise	HOLLAD	Kresk bloaziek	Kresk bloaziek e %
DIWAN	965	1 143	658	201	2 967	41	1,4%
Klasoù divyezhek publik	2 218	1 955	361	103	4 637	371	8,7%
Klasoù divyezhek katolik	1 778	1 945	394	19	4 136	253	6,5%
HOLLAD	4 961	5 043	1 413	323	11 740		
Kresk bloaziek	237	316	90	22		665	
Kresk bloaziek e %	5,0%	6,7%	6,8%	7,3%	7,3%		6,0%



Sifroù aet war greskiñ



Sifroù aet war zigreskiñ

An niver a skolidi divyezhek dre zepartamant ha dre hentad - Distro-skol 2007

	DIWAN	Klasoù divyezhek publik	Klasoù divyezhek katolik	HOLLAD	Kresk bloaziek	Kresk bloaziek e %
Aodoù-an-Arvor	496	1 024	402	1 922	97	5,3%
Penn-ar-Bed	1 708	1 901	1 416	5 025	350	7,5%
Il-ha-Gwilen	110	500	208	818	56	7,3%
Liger-Atlantel	197	156	35	388	8	2,1%
Mor-Bihan	456	1 056	2 075	3 587	154	4,5%
BREIZH	2 967	4 637	4 136	11 740	665	
Kresk bloaziek	41	371	253		665	6,0%
Kresk bloaziek	1,4%	8,7%	6,5%	6,0%		



Sifroù aet war greskiñ



Sifroù aet war zigreskiñ

Renkadur ar broioù diouzh an niver a skolidi divyezhek enno - Distro-skol 2007

	Diwan	Publik	Katolik	Hollad	Emdroadur 2006-2007
B.Vrest	808	964	880	2652	106
B.Kêr-Wened	240	203	753	1196	111
B.Gerne	441	594	86	1121	111
B.Treger ha Goueloù	130	647	158	935	47
B.an Oriant	73	559	279	911	28
B.Vontroulez	184	231	389	804	70
B.Kornôg-Kreiz Breizh	275	266	233	774	80
B.Bondi	88	100	457	645	9
B.Roazhon	110	372	92	574	30
B.Wengamp	224	198	113	535	56
B.an Alre	55	97	347	499	6
B.Naoned	133	156	35	324	3
B.Bloermael		55	172	227	0
B.Redon		98	95	193	1
B.Sant-Brieg	92	67	26	185	-25
B.ar Briver	64			64	5
B.Dinan	50			50	2
B.Sant-Maloù		30		30	4
B.Witreg			21	21	21
BREIZH	2967	4637	4136	11740	665



Sifroù aet war greskiñ



Sifroù aet war zigreskiñ

Renkadur ar c'humunioù diouzh an niver a skolidi divyezhek enno - Distro-skol 2007

	Kumun	Dept	krouidigezh	Diwan	Publik	Prevez	Hollad	Emdroadur e-keñver 2006
1	Gwened	56	1993	217	79	281	577	30
2	Roazhon	35	1977	110	316	92	518	15
3	Kemper	29	1977	291	127	33	451	21
4	Karaez-Plougêr	29	1985	275	53	61	389	51
5	Lannuon	22	1978	93	253	-	346	9
6	Lanniliz	29	1995	-	212	124	336	26
7	Naoned	44	1981	133	156	35	324	3
8	Lesneven	29	1981	133	-	167	300	1
9	Plougastell-Daoulaz	29	1995	-	129	160	289	8
10	Landerne	29	1987	55	189	40	284	17
11	Brest	29	1978	214	64	-	278	0
12	Teiz	56	1995	-	57	184	241	10
13	Lannarstêr	56	1988	-	210	-	210	-2
14	Oriant (an)	56	1978	73	68	67	208	-25
15	Pondi	56	1984	55	59	86	200	-18
16	Redon	35	1997	-	98	95	193	1
17	Plabenneg	29	1991	26	-	161	187	18
18	Releg-Kerhuon (ar)	29	1988	178	-	-	178	-17
19	Gwengamp	22	1981	88	13	84	172	17
20	Sant-Teve	56	2002	-	31	136	167	13
21	Sant-Brieg	22	1979	92	67	-	159	-12
22	Kastell-Paol	29	1978	87	-	70	157	9
23	Langedig	56	2001	-	51	101	152	8
24	Rostrenenn	22	1984	-	88	58	146	-10
25	Gwiseni	29	1990	93	-	37	130	-3
26	Landivizio	29	2000	-	-	128	128	14
27	Plijidi	22	1995	125	-	-	125	7
28	Kleder	29	1991	-	42	82	124	1
29	Plovez	29	1993	-	112	-	112	7
30	Henbont	56	1997	-	-	111	111	16
31	Mourieg	56	2000	-	-	105	105	-12
32	Douarnenez	29	1989	-	102	-	102	17
33	Pabu	22	1991	-	99	-	99	-7
34	Gwitalmeze	29	1977	44	-	54	98	-3
35	Brec'h	56	1989	-	97	-	97	-1
36	Montroulez	29	1988	42	54	-	96	2
37	Josilin	56	2003	-	-	96	96	11
38	Plistin	22	1999	-	94	-	94	1
39	Logunec'h	56	2003	-	-	93	93	15
40	Pempoull	22	1984	25	60	-	85	1
41	Ploue	56	1994	-	85	-	85	13
42	Plougerne	29	1996	-	84	-	84	1
43	Ploueskad	29	1999	-	-	82	82	3
44	Kawan	22	1987	-	78	-	78	8
45	Gwidel	56	1991	-	78	-	78	6
46	Pleuwigner	56	1994	-	-	77	77	8
47	Gwegon	56	2000	-	-	76	76	-3
48	Santez-Anna-Wened	56	1994	-	-	75	75	-2

49	Baod	56	1991	33	41	-	74	17
50	Lokoal-Mendon	56	1994	-	-	72	72	4
51	Erge-Vras (an)	29	2002	-	71	-	71	9
52	Gwipavaz	29	1995	-	70	-	70	1
53	Landreger	22	1997	-	-	67	67	-
54	Plounevez-Moedeg	22	2002	-	65	-	65	9
55	Pleskob	56	2005	-	-	65	65	18
56	Gourin	56	1994	-	42	22	64	1
57	Plunered	56	1998	-	-	61	61	6
58	Banaleg	29	1982	59	-	-	59	8
59	Gwiler-Leon	29	2002	-	-	59	59	-2
60	Perwenan	22	1999	-	57	-	57	-1
61	Bruz	35	2003	-	56	-	56	15
62	Kommanna	29	1977	55	-	-	55	1
63	Skaer	29	1998	-	55	-	55	5
64	Alre (an)	56	1999	55	-	-	55	-
65	Pont-'n-Abad	29	1995	-	-	53	53	-
66	Begnen	56	2000	-	-	53	53	-1
67	Rosko	29	2002	-	51	-	51	12
68	Sizun	29	2004	-	51	-	51	10
69	Dinan	22	2000	50	-	-	50	2
70	Pluverin	56	2005	-	-	49	49	-2
71	Rospezh	22	2004	-	-	47	47	-5
72	Plouzane	29	2003	-	47	-	47	6
73	Loperc'hed	29	2004	-	45	-	45	13
74	Faoued (ar)	56	1993	-	-	45	45	-1
75	Gouenoù	29	2004	-	44	-	44	9
76	Plouvien	29	1996	-	-	44	44	-16
77	Surzhur	56	2007	-	-	44	44	44
78	Tregon	29	1982	43	-	-	43	-6
79	Gregam	56	1996	-	-	43	43	-
80	Pont-Skorf	56	2001	-	43	-	43	-2
81	Louergad	22	1998	-	42	-	42	1
82	Kemperle	29	1989	41	-	-	41	-4
83	Klegereg	56	2004	-	-	41	41	7
84	Tregastell	22	1989	-	40	-	40	9
85	Gwennran	44	1999	40	-	-	40	12
86	Karnag	56	1992	-	-	40	40	-11
87	Tremeven	29	2005	-	37	-	37	15
88	Sarzhav	56	1993	-	36	-	36	-4
89	Benac'h	22	1998	-	35	-	35	-4
90	Brieg	29	2006	-	35	-	35	14
91	Kraozon	29	1989	35	-	-	35	-8
92	Konk-Kerne	29	1999	-	34	-	34	-3
93	Plouarzhel	29	2006	-	-	34	34	9
94	Lanneur	29	2004	-	33	-	33	10
95	Ploermael	56	1994	-	32	-	32	-
96	Kastell-Nevez-ar-Faou	29	2003	-	31	-	31	11
97	Milizag	29	2006	-	31	-	31	15
98	Faou (ar)	29	1998	30	-	-	30	-
99	Sant-Maloù	35	2000	-	30	-	30	4
100	Mêlrant	56	2006	-	-	30	30	3

101	Boulvriag	22	2005	-	-	29	29	2
102	Sant-Riwal	29	1983	-	28	-	28	1
103	Groñvel	22	1998	-	-	27	27	-1
104	Plouvorn	29	2006	-	-	27	27	8
105	Plouber	22	2000	-	-	26	26	-3
106	Tregaeg	22	2004	-	-	26	26	-13
107	Plougonvelen	29	2007	-	26	-	26	26
108	Bulad-Pestivien	22	2007	-	24	-	24	24
109	Sant-Nazer	44	1991	24	-	-	24	-7
110	Kewenn	56	2006	-	24	-	24	14
111	Pariz	75	2004	24	-	-	24	7
112	Daoulaz	29	2006	-	23	-	23	5
113	Kistreberzh	56	2000	23	-	-	23	-
114	Maoron	56	2000	-	23	-	23	-8
115	Bear	22	2007	-	22	-	22	22
116	Pluvergad	56	1996	-	-	22	22	3
117	Plozeved	29	2007	-	21	-	21	21
118	Gwitreg	35	2007	-	-	21	21	21
119	Mêl-Karaez	22	2004	-	-	20	20	4
120	Perroz-Gireg	22	2007	-	-	18	18	18
121	Louaneg	22	2006	12	-	-	12	1
122	Chapel-Nevez (ar)	22	2006	11	-	-	11	4
123	Kastellin	29	2007	7	-	-	7	7

* *Lec'hiadoù nevez-digoret er gumun d'an distro-skol 2007*



Sifroù aet war greskiñ




Sifroù aet war zigreskiñ

KILSELL WAR STADEGOÙ AR C'HELENN DIVYEZH EK EVIT AR BLOAVEZH-SKOL 2006/2007


- **1,31%** eo an dregantad a **skolidi divyezhek** a oa er c'helenn dre-vras e Breizh e 2006/2007.
- **Tremen 4%** eo dregantad an hentad divyezhek er c'hentañ derez en daou zepartamant m'emañ ar c'helenn divyezhek en e greñvañ : **Penn-ar-Bed** hag ar **Mor-Bihan**.
- **7,1%** eo dregantad ar c'helenn divyezhek er c'hentañ derez e **bro Treger ha Goueloù** (a zo e penn a-raok ar broioù e-keñver feur ar c'helenn divyezhek koulz er c'hentañ derez hag en eil derez).
- **14,6%** eo ar feur uhelañ a vugale skoliataet en hentadoù divyezhek e kentañ derez ur gumuniezh kumunioù (**Kumuniezh kumunioù Bro Venac'h**).
- En **un drederenn eus ar c'humunioù** e tigrisk pe e chom stanket pouez ar c'helenn divyezhek e 2006/2007 e-keñver 2005/2006. Ne oa kont e-giz-se nemet gant ur c'hard eus ar c'humunioù e 2005/2006 e-keñver 2004/2005.

Emdroadur keñveriet feur ar c'helenn divyezhek galleg-yezh rannvro e Breizh hag e Norzheuskadi etre 1993 ha 2006



An departamantoù

Pouez ar c'helenn divyezhek er c'hentañ derez dre zepartamant - Bloavezh-skol 2006/2007




E kornôg Breizh emañ pouez ar c'helenn divyezhek er c'hentañ derez en e greñvañ. Merzout a reer dreist-holl eo tost ken bras pouez an deskadurezh divyezhek er Mor-Bihan hag e Penn-ar-Bed. Splann eo ez eus dale gant departamant Aodoù-an-Arvor e-keñver an daou zepartamant-se avat : disoc'h an diouer a lec'hiadoù digoret e-kerzh an dek vloaz tremenet eo an dilañs-se. E departamantoù ar reter e chom izel feurioù ar c'helenn divyezhek. Startoc'h c'hoazh eo ar skolioù a vez lakaet d'an digeriñ skolioù enno. Seul chalusoc'h eo pa ouzer emañ tremen an hanter eus skolidi Breizh o chom en daou zepartamant-se.

Feur ar c'helenn divyezhek dre zepartamant ha dre live - Bloavezh-skol 2006/2007

	Skolioù-mamm	Skolioù kentañ	<i>Ishollad ar c'hentañ derez</i>	Skolajoù	Liseoù	Hollad
Departamant Aodoù-an-Arvor	3,24%	2,33%	2,70%	0,74%	0,11%	1,72%
Departamant Penn-ar-Bed	4,94%	3,48%	4,09%	1,66%	0,63%	2,78%
Departamant Il-ha-Gwilen	0,76%	0,57%	0,65%	0,13%	0,06%	0,40%
Departamant al Liger-Atlantel	0,35%	0,23%	0,28%	0,00%	0,00%	0,15%
Departamant ar Mor-Bihan	4,82%	3,42%	4,00%	1,12%	0,16%	2,55%
Breizh	2,47%	1,70%	2,01%	0,64%	0,18%	1,31%

Ar broioù

Pouez ar c'heleñn divyezhek er c'hentañ derez dre vro - Bloavezh-skol 2006/2007



N'eus nemet e 5 eus an 29 bro ez eus tremen 5% eus ar vugale zo skoliataet en un hentad divyezhek. Dont a ra war wel emañ ar c'heleñn divyezhek en e greñvañ e kornôg Breizh. Ahend-all, unnek bro zo c'hoazh hep tamm kinnig deskadurezh divyezhek ebet enno (**unan nebeutoc'h a zo e 2007/2008 memes tra digoradur lec'hiad Gwitreg**).

Gant bro Treger ha Goueloù emañ ar feur uhelañ (7,1%). Merzout a reer ivez eo e broioù "war ar maez", m'eo un tamm bevoc'h ar brezhoneg c'hoazh, ha broioù m'eo birvidik a-walc'h ar bed kevredigezhel m'emañ ar feurioù brasañ (bro Treger ha Goueloù, bro Kornôg Kreiz-Breizh, bro Bondi). Met live izel ar c'heleñn divyezhek e bro Gerne eo anadenn heverkañ ar gartenn a-us. Ouzhpenn bezañ izeloc'h eget re ar broioù tro-dro, feur ar c'heleñn e brezhoneg e kentañ derez bro Gerne zo izeloc'h eget hini bro Bloermael.


Feur ar c'helenn divyezhek dre vro ha dre live - Bloavezh-skol 2006/2007

	Skol- vamm	Skol gentañ	Ishollad ar c'hentañ derezh	Skolaj	Lise	Hollad
Bro an Alre	7,02%	3,97%	5,27%	0,54%	0,00%	3,26%
Bro an Oriant	4,27%	2,75%	3,38%	0,94%	0,29%	2,08%
Bro Bloermael - Kalon Breizh	3,34%	2,77%	3,01%	0,26%	0,00%	1,77%
Bro Bondi	6,92%	5,73%	6,23%	1,28%	0,40%	3,92%
Bro Dinan	0,71%	0,27%	0,45%	0,00%	0,00%	0,27%
Bro Gerne	3,21%	2,21%	2,63%	0,89%	0,04%	1,64%
Bro Gwenrann hag ar Briver	0,28%	0,23%	0,25%	0,00%	0,00%	0,14%
Bro Kêr-Wened	4,71%	3,56%	4,04%	1,97%	0,00%	2,71%
Bro Kornôg Kreiz-Breizh	6,60%	4,51%	5,35%	0,63%	6,35%	4,16%
Bro Naoned	0,81%	0,50%	0,62%	0,00%	0,00%	0,29%
Bro Redon hag ar Gwilen	1,75%	1,66%	1,70%	0,57%	0,00%	1,13%
Bro Roazhon	1,31%	0,88%	1,06%	0,18%	0,10%	0,60%
Bro Sant-Brieg	1,13%	0,90%	0,99%	0,00%	0,00%	0,52%
Bro Sant-Maloù	0,18%	0,14%	0,15%	0,00%	0,00%	0,09%
Bro Treger ha Goueloù	8,70%	5,95%	7,08%	1,29%	0,44%	4,32%
Bro Ventroutez	6,16%	4,59%	5,25%	0,52%	0,00%	3,23%
Bro Vrest	5,72%	4,06%	4,76%	2,79%	0,31%	3,31%
Bro Wengamp	4,69%	3,89%	4,22%	2,70%	0,00%	3,28%

An tri feur uhelañ zo evit pep live-skol

Ar c'humuniezhoù kumunioù

Pouez ar c'helenn divyezhek er c'hentañ derez dre gumuniezh kumunioù - Bloavezh-skol 2006/2007



Pa dremener d'ul live melestradurel bihanoc'h c'hoazh e verzer ne vez degemeret hentad divyezhek ebet gant tost an div drederenn eus an DFKE (Diazevadurioù Foran a Genlabour Etrekumunel) Breizh (88/140). Merzout a reer ivez pegen dizingal eo ar c'hinnig kelenn divyezhek e kornôg Breizh. Dizingal-tre eo en Aodoù-an-Arvor dreist-holl ma kaver un nebeud DFKE dezho ur feur uhel a-walc'h (tremen 8% peurliesañ) e-skoaz peurrest an departamant ma n'eus tost kinnig ebet. Kentoc'h war ar maez emañ an DFKEoù m'eo dereat pouez ar c'helenn divyezhek (Kreiz-Breizh, Bro-Dreger hag aodoù Bro-Leon). Heverk eo Kumuniezh kumunioù Bro Josilin dezhi 13,3% eus skolidi ar c'hentañ derez en un hentad divyezhek, ha hi er-maez eus ar « brezhonegva hengounel ».

Feur ar c'helenn divyezhek dre DFKE ha dre live (urzhiet diouzh pouez ar c'helenn divyezhek en DFKE eus ar skol-vamm d'al lise) - Bloavezh-skol 2006/2007

	Skolioù-mamm	Skolioù-kentañ	Ishollad ar c'hentañ derez	Skolaj	Lise	Hollad
KK Bro Voulvriag	6,7%	2,5%	9,2%	45,2%		16,2%
KK Bae ar C'hernig	14,8%	13,8%	14,2%	4,0%		11,6%
KK Kreiz Bro Dreger	12,8%	10,2%	11,4%			11,4%
KK Bro Venac'h	17,2%	12,4%	14,6%			11,2%
KK ar Poc'hêr	14,4%	10,1%	11,9%	2,6%	16,2%	10,9%
KK Plabenneg hag an Aberioù	11,7%	10,3%	10,9%	6,8%		10,2%
KK Bro Josilin	14,8%	12,3%	13,3%			9,2%
KK Bro Lesneven hag Aod ar Mojennoù	8,6%	8,6%	8,6%	9,5%	4,1%	8,3%
KK Beg ar C'hra	12,7%	4,9%	8,4%			6,6%
KK Kreiz Breizh	12,4%	9,2%	10,5%	1,3%		6,1%
KK Bro Logunec'h	8,3%	6,4%	7,2%	3,1%	0,0%	5,5%
KK Bro Leon	10,8%	8,9%	9,6%			5,3%
KTK Lannuon-Treger	10,3%	7,4%	8,6%	3,4%	0,7%	5,3%
KK ar Yeun Elez	7,4%	7,7%	7,6%			4,3%
KK an Teir Stêr	10,2%	7,3%	8,5%			4,3%
KK Gwengamp	11,2%	9,7%	10,3%	0,6%	0,0%	4,0%
KK Bro Vaod	7,1%	4,0%	5,3%			3,9%
KK Stêr an Intel	8,2%	3,7%	5,7%			3,9%
KK Bro Landivizio	7,3%	4,8%	5,9%	0,8%	0,0%	3,8%
KK Bro an Alre	8,5%	4,9%	6,5%	0,9%	0,0%	3,8%
KK Bro Maoron ha Breselien	5,2%	5,7%	5,5%			3,7%
KK Aod ar Meurvein	7,9%	6,3%	7,0%			3,6%
KK Bro Ploue, ag ar Skorf d'ar Blavezh	4,4%	3,1%	3,7%	3,3%		3,6%
KTK Bro Kêr-Wened	6,7%	4,8%	5,5%	3,1%	0,0%	3,5%
KK Sant-Yann-Brevele Kumuniezh	5,9%	4,4%	5,1%			3,4%
KK Bro Landerne-Daoulaz	7,2%	3,5%	5,1%	1,4%	0,5%	3,0%
KK Bro ar Roue Morvan	5,4%	4,2%	4,7%			2,6%
KK Bro Bondi	5,1%	4,2%	4,5%	1,3%	0,4%	2,6%
KK Arvor ar Stêr-Aon	3,5%	3,6%	3,6%			2,5%
KK Gourenez Rewiz	4,3%	3,5%	3,8%			2,5%
KTK Kemper-Kumuniezh	4,5%	3,5%	4,0%	3,4%	0,1%	2,4%
KK Su ar Vro Vigoudenn	5,8%	3,6%	4,5%			2,3%
KK Bro Douarnenez	5,0%	4,3%	4,7%			2,3%
KK al Loc'h	2,3%	3,5%	3,0%			2,2%
KK "Pempoull Goueloù"	5,6%	3,7%	4,5%			2,2%
Kumuniezh-kêr Brest Meurgêr ar Mor (BMAM)	4,2%	2,9%	3,5%	2,3%	0,1%	2,1%
KTK Bro an Oriant	4,7%	3,0%	3,7%	0,8%	0,3%	2,1%
KK Bro An Hirwazh	3,9%	1,8%	2,7%			2,0%
KK Gourenez Kraozon	2,8%	2,7%	2,7%			1,9%

KK Bro Redon	3,4%	3,3%	3,3%	1,0%	0,0%	1,8%
KK Bro Gemperle	3,9%	2,6%	3,1%			1,8%
KK Bro-C'hlazig	3,7%	0,0%	1,7%			1,2%
KK Kerne-Uhel	3,1%	0,1%	1,4%			1,0%
KTK Bro Vontroulez	2,5%	1,3%	1,8%			1,0%
KK Bro Konk-Kerne	1,9%	1,6%	1,7%			1,0%
KTK Bro Sant-Brieg (TOBRI)	2,0%	1,6%	1,7%			0,8%
KK Ploermael	2,7%	1,0%	1,7%			0,8%
KTK Meurgêr Roazhon	1,6%	1,1%	1,3%	0,2%	0,1%	0,7%
KK Bro Gistreberzh	1,4%	1,0%	1,1%			0,6%
KK Dinan (KUDI)	1,9%	0,7%	1,2%			0,6%
Kumuniezh-kêr Naoned (KUN)	0,7%	0,5%	0,6%			0,3%
KK Kab Atlantel	0,5%	0,4%	0,4%			0,2%
KTK Bro Sant-Maloù (TOKMALOÙ)	0,4%	0,3%	0,3%			0,2%
KTK Bro Sant-Nazer hag hec'h Aber	0,2%	0,2%	0,2%			0,1%

Ar c'humunioù

Feur ar c'helenn divyezhek dre gumun ha dre live - Bloavezh-skol 2006/2007

	Depar- tamant	Skol- vamm	Skol gentañ	<i>Ishollad kentañ derez</i>	Skolaj	Lise	Hollad
Benac'h	22	37,3%	23,6%	29,8%			12,5%
Boulvriag	22	13,8%	4,9%	8,7%			5,9%
Chapel-Nevez (Ar)*	22	100,0%		100,0%			100,0%
Dinan	22	6,8%	2,4%	4,1%			0,9%
Groñvel	22	21,4%	27,5%	25,2%			25,2%
Gwengamp	22	14,2%	13,1%	13,5%	0,6%		3,1%
Kawan	22	33,6%	28,9%	31,3%			31,3%
Landreger	22	20,3%	12,1%	14,9%			3,5%
Lannuon	22	12,1%	11,2%	11,5%	5,7%	0,7%	5,2%
Louaneg*	22	8,9%		4,0%			4,0%
Louergad	22	15,7%	18,0%	16,9%			16,9%
Mêl-Karaez	22	16,2%	4,4%	9,7%			9,7%
Pabu	22	39,1%	30,2%	33,8%			33,8%
Pempoull	22	11,4%	8,0%	9,4%			3,4%
Perwenan	22	25,0%	18,0%	21,2%			21,2%
Plijidi	22				100,0%		52,2%
Plistin	22	41,4%	23,7%	30,4%			16,4%
Ploubêr	22	7,9%	10,1%	9,1%			9,1%
Plounevez-Moedeg	22	100,0%	22,0%	46,7%			46,7%
Rospvezh	22	28,2%	9,0%	15,8%			15,8%
Rostrenenn	22	41,9%	30,5%	35,2%	1,8%		9,2%
Sant-Brieg	22	4,4%	3,3%	3,7%			1,1%
Tregaeg	22	4,6%	4,4%	4,5%			4,5%
Tregastell	22	24,1%	12,1%	17,8%			17,8%

Banaleg	29	8,7%	7,1%	7,8%			4,8%
Brest	29	2,1%	1,7%	1,9%	0,2%	0,1%	0,8%
Brieg*	29	7,4%		3,2%			1,8%
Daoulaz*	29	14,2%		6,4%			2,1%
Douarnenez	29	6,4%	5,0%	5,5%			2,5%
Erge-Vras (an)	29	7,9%	5,2%	6,4%			6,4%
Faou (ar)	29	11,0%	11,5%	11,3%			11,3%
Gouenou	29	9,6%	0,9%	4,6%			4,6%
Gwiler-Leon	29	10,3%	4,6%	6,6%			4,3%
Gwipavaz	29	5,2%	3,8%	4,4%			2,9%
Gwiseni	29	18,6%	19,2%	18,9%	100,0%		49,3%
Gwitalmeze	29	11,6%	9,9%	10,6%			6,4%
Karaez-Plougêr	29	24,0%	16,2%	19,4%	2,6%	14,0%	12,3%
Kastell-Nevez-ar-Faou	29	11,4%	0,4%	5,0%			2,2%
Kastell-Paol	29	19,5%	14,7%	16,6%			6,0%
Kemper	29	5,1%	3,9%	4,4%	3,3%	0,1%	2,4%
Kemperle	29	4,2%	2,2%	3,0%			1,1%
Kleder	29	28,8%	25,1%	26,5%	11,8%		22,4%
Kommanna	29	31,7%	24,3%	27,4%			18,5%
Konk-Kerne	29	2,2%	1,5%	1,8%			0,8%

Kraozon	29	5,1%	4,8%	4,9%			2,9%
Landerne	29	14,5%	7,8%	10,6%	1,9%	0,6%	4,5%
Landivizio	29	8,7%	7,8%	8,2%	1,0%		3,5%
Lanneur	29	21,6%	2,5%	9,4%			4,0%
Lanniliz	29	38,0%	28,4%	32,5%	8,2%		19,8%
Lesneven	29	19,1%	16,5%	17,5%	2,7%	1,7%	8,7%
Loperc'hed	29	14,9%	3,7%	8,4%			8,4%
Milizag*	29	8,1%		3,3%			3,3%
Montroulez	29	7,0%	4,7%	5,6%			1,8%
Plabenneg	29	13,5%	12,8%	13,1%	5,3%		9,8%
Plouarzhel*	29	15,2%		6,5%			6,5%
Ploueskad	29	18,2%	15,5%	16,6%			10,2%
Plougastell-Daoulaz	29	21,0%	14,3%	17,0%	3,1%		12,9%
Plougerne	29	14,6%	10,4%	12,3%			12,3%
Plouvien	29	9,5%	14,6%	12,3%			12,3%
Plouvorn*	29	11,8%		4,7%			4,7%
Plouzane	29	4,0%	2,3%	2,9%			1,9%
Ploveur	29	33,5%	20,6%	25,9%			25,9%
Pont-'n-Abad	29	6,7%	4,3%	5,2%	0,0%		1,3%
Releg-Kerhuon (ar)	29	0,0%			17,4%		8,8%
Rosko	29	15,1%	14,5%	14,7%			14,7%
Sant-Riwal	29	100,0%	100,0%	100,0%			100,0%
Sizun	29	20,8%	8,6%	13,4%			8,6%
Skaer	29	10,3%	10,0%	10,1%			8,5%
Tregon	29	7,6%	6,5%	6,9%			4,8%
Tremeven*	29	22,1%	4,8%	12,1%			12,1%

Bruz	35	3,8%	1,6%	2,4%			0,9%
Redon	35	15,3%	12,5%	13,5%	1,3%		3,2%
Roazhon	35	3,1%	2,4%	2,7%	0,4%	0,1%	1,1%
Sant-Maloù	35	0,7%	0,5%	0,6%			0,2%

Gwenrann	44	1,9%	1,2%	1,5%			0,6%
Naoned	44	1,7%	1,1%	1,3%			0,5%
Sant-Nazer	44	0,5%	0,5%	0,5%			0,2%

Alre (an)	56	4,8%	2,0%	3,2%			1,5%
Faoued (ar)	56	15,3%	12,3%	13,4%			6,6%
Baod	56	8,5%	6,4%	7,3%			4,2%
Begnen	56	21,4%	18,1%	19,6%			19,6%
Brec'h	56	29,4%	15,4%	21,6%			8,9%
Gourin	56	19,1%	13,2%	15,4%			5,5%
Gregam	56	6,0%	7,9%	7,1%			3,9%
Gweson	56	33,0%	38,7%	36,2%			36,2%
Gwened	56	7,8%	5,9%	6,7%	4,0%		3,2%
Gwidel	56	6,5%	5,0%	5,6%			4,0%
Henbont	56	5,5%	3,8%	4,5%	0,8%		1,9%
Josilin	56	19,3%	12,9%	15,4%			6,8%
Karnag	56	14,8%	11,3%	12,7%			4,8%
Kewenn*	56	2,8%		1,0%			0,6%

Kistreberzh	56	3,5%	2,0%	2,6%			0,9%
Klegereg	56	8,8%	13,5%	11,6%			11,6%
Langedig	56	22,0%	14,6%	17,9%			13,4%
Lannarstêr	56	6,4%	14,7%	9,1%	3,0%	3,7%	4,5%
Logunec'h	56	26,6%	6,6%	8,7%	3,1%		5,2%
Lokoal-Mendon	56	23,0%	11,8%	17,0%			17,0%
Maoron	56	8,0%	9,1%	8,7%			4,9%
Mêlrant*	56	38,5%	13,5%	26,0%			22,5%
Mourieg	56	22,7%	32,3%	27,9%			27,9%
Oriant (an)	56	5,1%	4,0%	4,6%	0,7%		1,6%
Pleskob	56	12,0%	5,3%	8,1%			8,1%
Pleuwigner	56	11,8%	6,8%	8,9%			6,0%
Ploermael	56	4,2%	1,5%	2,6%			0,9%
Ploue	56	9,5%	6,4%	7,6%	3,3%		5,6%
Plunered	56	11,6%	6,3%	8,8%			5,4%
Pluvergad	56	5,7%	6,9%	6,4%			6,4%
Pluverin	56	23,5%	21,1%	22,1%			22,1%
Pondi	56	13,9%	9,6%	11,4%	1,6%	0,4%	3,5%
Pont-Skorf	56	10,9%	10,6%	10,7%			10,7%
Santez-Anna-Wened	56	16,2%	12,6%	14,2%	9,5%		5,1%
Sant-Teve	56	17,4%	10,5%	13,4%			10,3%
Sarzhav	56	6,5%	5,1%	5,6%			3,2%
Teiz	56	29,2%	20,5%	24,2%	4,9%		21,0%

* Lec'hiadoù nevez-digoret er gumun d'an distro-skol 2006



Sifroù aet war greskiñ



Sifroù aet war zigreskiñ

Kresket eo ar feur e holl gêrioù-penn an departamantoù nemet Naoned. Nec'hus eo gwelet eur tremenet e Gwengamp eus 20% a skolidi divyezhek er skolioù-mamm e 2003/2004 da nebeutoc'h eget 15% e 2006/2007.